


SKRID 27. SKRID 27. SKRID 27. SKRID 27. SKRID 27. SKRID 27. SKRID



GERIADUR YEZH DOUARNENEZ
GANT PER DENEZ
EMAN AL LEVRENN 2, "AVEL, AMZER
HA "MOR" O PAOUEZ DONT ER-MAEZ.
PRIZ: 45 LUR
HOR YEZH, 1 PL. PEGUY, POUILLBRIANT,
29 260 LESNEVEN

HOR YEZH

HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH
HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH-HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH SAVET E 1954
GANT ARZEL EVEN. RENER: PER DENEZ

KOUMANANT : 50 LUR DA Y. DESBORDES
1, PLASENN CH. PEGUY, POUILLBRIANT
29260 LESNEVEN. CCP 1499 51 ROAZHON

EMBANNADURIOU HOR YEZH

GERIADUR YEZH DOUARNENEZ

1. AR PESKED HAG AL LABOUSED
40 lur

HIROC'H EO AN AMZER EGET

AR VUHEZ Danevelloù
gant PER DENEZ

36 lur

SKRID 27

J.E. MOUTON

Gwerz Bobby Sands p.5

F.R.MEAVENN

Kimiad p.8

E. POE

Hentenn... p.17

S. BERNARD

Ar c'hrevrin p.40

DE VILLIERS DE L'SLE ADAM

Ar merdead savach p.43

Antonia p.48

Bleunioù an deñvalijenn p.50

Priz an niverenn-mañ : 8 LUR

SKRID 27

KELAOUENN DISKLERIET HERVEZ LEZENN

EIL TRIMIZIAD 1981

TI-MOULAN PREVEZ

RENER: GWENDAL DENEZ

KOUMANANT 30 LUR EVIT 4 NIVERENN

PER DENEZ

RI , PLOARE

29100 DOUARNENEZ

CCP DENIS 1499-51 ROAZHON

JAKEZ-ERWAN MOUTON

GWERZ BOBBY SANDS

Derry
Derry
Tiez ruz o zoennou
kouchet an eil ouzh egile
evel merc'hed kozh aezet war staon un ospiz.
Tiez saotret o mogerioù
gant sloganou treset gant daouarn dizampart .

Derry
Derry
Derry ar spont
Derry ar guzhmuzik
Derry al libouzell
Derry, Derry ar follez
kumnet gant orjal dreinek
evel penn ar C'hrist war hent e galvar,
Derry, Derry ar garvan.

Aon
peget war mibion al lagad
goulou sklentenn un oto vindrailherez
e korn ur straed.
Soudard duet e fas
o strinkañ mezh diouzh ur vouest houarn
bukañ a ra e fuzuilh :
jarneou / Bann-maen / tec'h
nijad ur strobard bugale truilhennek
o nijal a bep tu

o nijal e pep lec'h
e anv ar c'hailhastr
e anv ar c'hazarc'h
hag a beg ouzh o dilhad
hag a bouez war o c'halon
evel ma ra an anken,
an enkreuz, an hirnez

pep den a zo gantañ
ur c'hrignbev o krignañ e greiz

kontilli kuzhet dindan kador ur c'harr
pistoled danguzhet e foñs bouest ar manegoù

pep den a vev en anken
ya, n'eus ket tu
there is no way
NO WAY !

pep hini en deus dastumet gerioù
da ganañ kumujenn ouzh egile

onjal dreinek e pep lec'h
a gresk evel ma kresk
an delioù gor

ya, amañ out bet ganet
e-touesk ar breinadur
desket 't eus stlepel mein
evel m'o deus graet ar re all
desket eo bet dit lezenn ar ghetto
desket dit ivez amañ ar vuhez amañ
evel ur c'hrignbev

desket eo bet dit ar gerioù
dilabour feulster muntreer
gwallerezh laeroñsi

desket a zo bet dit
emañ da re evel un is-ouenn
un toullad laeren
un toullad gaouidi
vil ha didalvez
" rak n'int ket yac'h "
they have got a loose screw
in their minds
you can't trust them

daoust hag-eñ ez eus c'hoazh
ur ster gant ar vuhez amañ ?
Bez ez eus skeudenn un den gourvezet
e wad o vouilhañ e huñvre pep bugel.
Hag-eñ ez eus c'hoazh
ur ster gant ar vuhez amañ
evit ar re o deus desket
kasaat
mallozhiñ
talvout ur gwall ?

Marv out
dileuniet da gorf eus pep naon

emañ da gorf e skeudenn ar vro-se :
goulllo
sec'h c'hroilh

Marv out
Krist paour

Da v/Bobby Sands marv goude
un diskrog-boued
Miz Mae, Sant Malo.

K I M I A D

Pezh-c'hoari gant Fant R. MEAVENN

(E meur en ur gambr baour, e-kreiz ur porzh-mor bras sioulaet gant an noz o tiskenn. A-wechoù e vez frailhet ar sioulder a-greiz-holl gant bouderezh al listri o vont kuit. Ur pikol armel a zo war an tu dehou, ha netra a-hend-all nemet ur gwele houarn, un daol ha div pe deir c'hador. Lan a zo azezet war ar gwele, o vutuniñ. Emañ Mari e-kichen ar prenestr serret, o sellout ouzh an dour.)

MARI.- Me, ne soñjan nemet er vunutenn-se hon eus tremenet a-gevret en ti-hent-houarn da zeiz kentañ ar bloaz, dres a-raok mont kuit, p'hoc'h eus lavaret e vije bet ar wech diwezhañ.

LAN.- Ha n'eo ket bet ar wech diwezhañ.

MARI.- Houmañ kennebeut ne vo ket ar wech diwezhañ.

LAN.- Gwelloc'h e vije komz eus traoù all, Mari.

MARI.- N'heller ket komz atav diwar-benn ar vorianed hag ho lestr.

LAN.- N'oc'h ket sioul, n'oc'h ket seder.

MARI.- Sioul ha seder, ha mont en-dro d'an ostaleri bremaik, an toull souezhus-se gant e dud seven a gavit bepred war an diri hag e-kichen ho tor. Ne ouzoc'h ket petra a soñjan ? Un deiz, setu pezh a c'hoarvezo. Erruout a rin gant an tren, ur wech muioc'h em buhez, ha mont da c'hortoz ac'hanoc'h en ostaleri-se, hag e tevio unan dianav da glask lavarout din oc'h bet bezzet pe lazhet, ha ne c'hello ket gant an holl dud-se. Chom a raio, diaezet, ne c'hello ket.

LAN.- Atav e welit traoù diwir, Mari, diwirheñval, peadra da goll kalon.

MARI.- N'eo ket traoù hepken. Ar paotr-lizhiri ivez, da skouer, - hennezh a welan a-dreuz d'ar mogerioù, betek gouzout hag en deus ul lizher evidon ha peur e kouezh e-barzh ar voest e traoñ an ti.

LAN.- Mari, n'on ket...

MARI (fauls a-greiz-holl).- Me 'garfe ne vefec'h netra evidon, me 'garfe dihuniñ.

LAN.- Mari, Mari... Keuz am eus, sellit, da vezañ ho lakaet da zont ar wech-mañ. Re a labour hag a drabas am eus bet gant al lestr, ha n'eus ket bet amzer...

MARI.- Atav e kavit un tu dereat evit diskleriañ brav pezh a c'hoarvez - aon hoc'h eus e tiskennfemp d'ar strad ennomp hon-daou, o! me 'garfe...

LAN.- Aon am eus razoc'h, Mari, hag am eus bet bepred. Petra oc'h bet savet da c'hortoz digant ar vuhez ?

MARI.- Me ? Eveldoc'h, moarvat, hag evel an holl war an douar kozh-mañ en deus enkounac'haet betek anv an dud o deus lakaet ar vuhez da darzhañ warnañ,

gwechall. Ha bremañ e kerzh an holl dre amañ evel logod e-barzh un ti d'an noz, war veg o zreid, didrouz. Ha ne lakaont netra da darzhañ, sur. Ha n'int ket lorc'hus ken - tra - gant petra e vijent ? Savet omp holl evit ul labour ki bennak, ul labour ki chadennet, hag ur bafision da dri-ugent. Hag arabat deomp sevel hor penn rak neuze e kouezhfe an oabl warnomp. Setu petra on bet savet da c'hortoz digant ar vuhez. Hag e ouzon ivez n'emañ ket e-giz-se, ar vuhez, n'eo ket ur gortoz, nag ur goanag bihan war-lerc'h ur c'herse.. Ar vuhez, ar vuhez...

LAN.- N'eus ket pell hoc'h eus lavaret, Mari, e oa ar vuhez un ti a vije deomp, deoc'h ha din, ha marteze...

MARI.- Ya, ya - met ar vuhez, ar vuhez... N'ouzon ket penaos lavarout. Ha petra a c'hoarvezo en ti-se ? Ur wreg e vin, ur wreg, ha n'eo ket Mari, ha n'eo ket me. Ha neuze eo e vimp evel logod, ya, heñvel ouzh ne vern piv. Ur moraer hag e wreg, ur plac'h yaouank hag he gwaz...

LAN.- Pesketourez-loar. N'hon eus ket bet amzer a-walc'h, setu. Al loar eo a garit, Mari, ha n'hon eus ket amzer. Warc'hoazh ez it kuit, ha me dimeurzh, ha n'em eus netra da ginnañ deoc'h nemet an ti-se, ha c'hoazh, pegoulz, Mari ? Goude pegement a lizhiri a vo ret dezho treuziñ ar mor hag an douar ?

MARI.- Lizhiri...

LAN.- Ho re, Mari, bepred o pignat hag o kouezhañ - ha va re... n'ouzon ket skrivañ.

MARI.- Eo.

LAN.- O ! c'hoarzhit un tammig.

MARI.- Poent eo din mont kuit.

LAN.- Ma ne vije ket al labour a chom, Mari...

MARI.- Gouzout a ran. Warc'hoazh e teuin abred, da unnek eur hanter ez a kuit an tren. C'hwi 'oar e rankfen bezañ aet kuit fenozh. Kenavo, Lan. Nann, nann...

LAN.- Mari...

MARI.- Ya ?

LAN.- N'eus ket a loar, Mari pa garer. Ha n'eus ket ezhomm da gomz...

MARI.- Kenavo, Lan.

DARN II

(Lan en deus klasket labourat, ha goude en deus lazhet ar goulou hag eo aet da gousket war ar gwele. A-greiz-holl ez eo enaouet ar goulou gant unan en deus digoret an nor. Breur Lan eo, ur paotr treut ha dislivet e zremm, rok e zoare.)

PER.- En defvalijenn e oas ?

LAN.- Penaos out deuet ? A-belec'h e teuez ?

PER (goapaus).- "A belec'h e teuez, maouez ? Ha ma teuez ganin, da gened ne welfo ket, ha bepred e vo ennout en o sked, yaouankiz ha koantiz"... Mont a ra mat ?

LAN.- Ha ganit ?

PER.- Sell. Penaos e c'hellez chom el lastez kambr-mañ ? Me 'garfe gwelloc'h mervel gant an naon...

LAN.- N'out ket bet ken pell-se diouzh mervel gant an naon, a gav din.

PER.- Hag e kav dit ivez on deuet skuizh gant ar baourentez, hag e kav dit ivez moarvat on deuet amañ da gestal - da arc'hant, da arc'hant - tufañ a ran

war da arc'hant. N'on ket evel ar re all er gêr.
Sunerion, sacherion...

LAN.- Va zud...

PER.- A ! ya, chafis ac'h eus. Ur vamm hag a vez enoeet eus ar mintin d'an noz, ur vamm ha n'he deus a eñvorennoù nemet reoù he bugaleaj, ur sodez, ha tri breur, daou o verc'heta er gêr dindan warez o mamm, ha me. Me 'm eus bet doujafis evidout, da nebeutañ, betek ober evel d'out pa oan va-unanik er gêr, ha chom mut evel ur peul evit lakaat ar re all da grediñ em boa traoù a bouez da lavarout. Doujafis am eus bet, paour kaezh a zo ac'hanon, evit unan en deus bepred kollet e vuhez... Na lez ket ac'hanon da genderc'hel 'ta. Na lez ket ac'hanon da vont en-dro e-giz ur mekanik... Petra a felle din lavarout ?

LAN.- Azez, Per, amañ.

PER (o sellout ouzh an armel).- Ne fell ket din azezañ. N'eo ket difennet chom war-sav, moarvat ! Pebezh armel spontus ! Gwelet em eus Mari o tont er-maez eus an ti, en noz. Petra e teu da vezañ ?

LAN.- Atav heñvel.

PER.- Ha ne zimezez ket ganti ?

LAN.- Nann, ket c'hoazh. Pa vo bet tremenet o arnodennoù gant an daou a zo er gêr, te 'oar.

PER.- N'he deus ket lakaet troc'hañ he blev ?

LAN.- Nann.

PER.- Ha moarvat e kouezhont bepred war he gouzoug p'en em laka da gomz re vuan. P'am eus gwelet anezhi en traoñ, me hag a oa o c'hortoz pell a oa e-kichen an nor-dal, c'hoant am eus bet lammat warni ha lavarout: Setu me, Mari, soñj mat hoc'h eus - lazhet em eus un

den hiziv... O ! arabat sevel ha sellout ouzhin gant an daoulagad-se. Me ivez a gave din - a-raok c'hwec'h eur fenozh - ne c'helle c'hoarvezout an traoù-se nemet war ar c'hazetennoù, ha gant ar re all, ne vern piv... Ha n'eus netra d'ober gant da arc'hant, gwelout a rez... (Evel unan oc'h eñvoriñ, goustad). N'anavezez ket anezhañ. Ur paotr kozh eo, ur mignon, koulz lavaret. Ne gav ket dit, nann, e vijen bet speredek a-walc'h da vont da lazhañ ur bern teil pinvidik bennak, ur pemoc'h a baramantour, unan e-giz-se ? Nann, nann. Ur paotr kozh hag en doa un armel dres evel houmañ. Ket dres, rak e hini a oa leun a voutailhoù gwin. Gant ur voutailh, e c'heller lazhañ un den, hañ, hep gouzout na penaos na perak, e gwirionez... N'on ket deuet da c'houlenn sikour - d'al lec'h ma'z an, n'em eus ket ezhomm a sikour... Soñjet em eus - a-raok, ez in da welout anezhañ evit ar wech diwezhañ... Dreist-holl ne oa ket pell ac'halen... Edomp en ti-se rag-eeun da hemañ, ar prenestr er c'horn dehou... Ha marv eo.

LAN.- Mont a ran da welout.

(Hag ez a kuit trumm, hep ur ger muioc'h.)

DARN III

(Ar beure eo. Emañ Per, gwisket, war ar gwele pa skoer ouzh an nor. Mari a zeu tre. Per a sav.)

MARI.- O ! (Ur pennadig). N'emañ ket ho preur er gêr ?

PER.- Nann.

MARI.- Pell 'zo emañ aet kuit ?

PER.- Dec'h d'an noz. Na chomit ket ouzh an nor. Azezit. (Kempenn a ra ar gwele.)

MARI.- Arabat deoc'h en em zirenkaf evidon.

PER.- N'eo ket evidoc'h.

MARI.- N'em eus ket kalz amzer.

PER (War un ton sirius-tre).- Penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

MARI.- C'hwi a zo deut da vezaf treut...

PER.- N'em eus ket ezhomm eus ho truez.

MARI.- Nag eus truez nag eus tra all ebet moarvat.

PER.- Chomit e-giz-se, chomit evel ma oac'h diouzh-tu aze. N'hoc'h eus ket kemmet tamm, Mari. (Gant ur vouezh dishefivel.) N'heller ket lavarout ez oc'h kaer, nemet a-greiz-holl. Perak e teuit en un toull evel hemañ ? N'eus ket ur sotoni er bed na rafec'h ket. Mari...

MARI.- Ne ouzoc'h ket petra a lavarit...

PER.- O ! eo. Fellout a ra deoc'h bezañ stag... Heizezed evel doc'h a zo daou dra dezho da ober - pe en ur gaoued, chadennet, o tebriñ - pe neuze...

MARI.- Neuze ?

PER.- Redek kuit.

MARI.- Ha neuze ?

PER.- N'hoc'h eus dalc'het soñj eus netra marteze ?

MARI.- Ket bremañ.

PER.- Me, Mari, me 'm eus dalc'het soñj eus ur beure evel hemañ, m'hoc'h eus poket din trumm, war un hent... Ha goude-se oc'h chomet daou zevezh pe daou vloaz, ne ouien mui pet amzer on chomet ouzh ho kortoz. Petra a oa c'hoarvezet, Mari !

MARI.- N'ouzon ket.

PER.- Aon hoc'h eus bet...

MARI.- N'hoc'h eus lavaret netra...

PER.- Roit din ho taouarn, e-giz-se. M'em bije lavaret un dra bennak, neuze, petra ho piije lavaret ?

MARI (izel).- N'ouzon ket.

PER.- Bremañ e ouzon. Chomit sioul. Ar gwir am eus da gemer ho taouarn em daouarn, rak emañ o vont kuit ha ne zeuin biken en-dro. Na sellit ket ouzhin, Mari, e-giz-se. Petra a ouzoc'h diwar-benn ar vuhez ? Ne zeuin ket en-dro. Perak hoc'h eus dilezet ac'hanon ?

MARI.- Peur e teuio ho preur ? Peur e teuio ?

PER.- Mari...

MARI.- Nann, n'hoc'h eus galloud ebet warnon bremañ. Nann, echu eo. N'eo ket me am eus dilezet ac'hanoc'h. Ha ne welit ket an eur ? Sellit... Petra a c'hellan ober ... An eur, an tren, ho preur... petra en doa da ober ?

PER.- N'ouzon ket.

MARI (a-greiz-holl).- Mont a ran kuit. (Ha gant ur vouezh dishefivel). O ! n'hoc'h eus galloud ebet warnon bremañ. Mont a ran kuit, mont a ran kuit d'an ti-hent-houarn...

PER.- Mont a rin ganeoc'h, Mari... (Kemer a ra anezhi etre e zivrec'h, pa zigor an nor trumm. Lan a zeu tre hag e chomont dirazañ, tapet ha sabatoet.)

LAN (da Ber).- Kae kuit.

PER.- N'eo ket...

LAN.- Kae kuit.

PER.- N'eo ket abalamour m'am eus lazhet unan bennak...

LAN.- Kae kuit, kae da welout an hini ac'h eus lazhet. Ne rez nemet an hanter eus an traoù. Chomet on pell, gwir eo, met da nebeutañ eo bet pareet ganin, an hini ac'h eus lazhet. Chomet on pell a-walc'h evit lezel amzer ganit da laerezh... Kae kuit. Kit kuit ho-taou... kit kuit !

(Treif a ra e gein outo. Mari eo an hini gentañ o vont kuit, o lezel an nor digor. Ha goude Per.)

o

HENTENN an DOKTOR KOLTAR hag ar C'HELENNER PLUNV

E-doug razarc'h 18...., tra ma oan o veajiñ a-dreuz proviñsioù kreisteiz pellañ Bro-C'hall (sic) en em gavis un nebeut levioù bennak eus an ospital, un ospis prevez evit ar re sot, em boa klevet kalz kaozeal diwar e-benn gant mezeion, mignoned din e Pariz. Dre n'em boa morse gweladennet seurt ospital e tivizis ober va mad eus an degouezh, kinnig a ris eta d'am c'henveajour (un "j gentleman" em boa graet anaoudegezh gentañ un nebeut devezhioù a-raok) ober ur c'hamdro un eurvezh-pad a-benn mont da welet ar greizenn-se. Eñ, avat, ne fellas ket dezhañ asantif war zigarez ma oa mall bras warnañ ha dre ma yae heuget ken gant gwelout un den diskiant. Evelato e viras ouzhin a chom hep sevenif va c'hoant dre zereadegezh en e geñver, marc'hekaat a rafe eñ war-raok war e bouez din da c'hellout e adaptout a-raok an noz pe d'an diwezhatañ an tro noz. P'edomp war gimidiñ e teuas soñj din e vefe diaes marteze antreal hep lizher-aotre nemet anavezout a rafan a-dost an Ao. Maillard, ar rener, rak kalz strishoc'h e vez ar reolennadur er c'hlinikoù prevez eget en ospitalioù foran. Eñ, gouez dezhañ, en devoa graet anaoudegezh gant an Ao. Maillard un nebeut bloavezhioù a-raok ha va ambroug a c'hallfe betek an nor evit lavarout piv e oan, treif a rafe kein kerent goude avat rak ne oa

ket evit gouzañv an diskiantegezh.

E drugarekaat a ris ha setu ni hon-daou e-biou d'an hent bras, tre en un hent-treuz glazennek a yae tost d'en em goll, un hanter eurvezh pelloc'h en ur c'hoad teñval a c'holoe troad ar menez. A-vec'h m'hon devoa marc'hekaet daou vil er c'hoad gleb ha teñval p'en em zispakas dirazomp ar glinikenn. Ur c'hastell sebezus e oa, gwall-zismantret an tamm anezhañ, kozh hag hanter kouezhet en e boull kem ma oa diaes soñjal e c'helle tud annezñ e-barzh. Ouzh e welout e chomis mantret ha, chomet a sav gant va marc'h, e voe darbet din treiñ kein. Koulskoude e teuas mezhan din pelloc'h da vout ken aonik ha mont a ris war-raok.

Dre ma tostaemp ouzh an nor vras e verzis e oa kornzigoret anezhi ha spurmantif a ris dremm un den war-c'hed. Un herrad goude e teue an den en hon arbenn, davet va c'heneil a zegemeras gant e anv, o stardañ dezhañ e zorn hag ouzh e bediñ da ziskenn a-ziwar e jav. An Ao. Maillard e-unanan hini 'oa, ur gwir "jenteleman" a c'hiz kozh anezhañ : neuziet-kaer, meur-dezus e emzalc'h, direbech e zoareoù. Skinañ a rae gant ur siriusted, un dellezegezh hag ur galloud am lakaas fromet.

Va c'hamarad a lavaraz dezhañ piv e oan ha petra e oan deuet d'ober ha goude m'en doe prometet an Ao. Maillard e rafe aketus war va zro e kimiadas diouzhimp, n'em eus ket e adwelet abaoe.

Goude an disparti e voen ambrouget gant ar rener betek ul sal-emgav vihan kinklet betek re gant tud kizidik ouzh an arlivoù arzel, enni etre traoù arall levrioù e-leizh, tresadennoù 'forzh pegement, bokedoù bleunioù ha binvioù sonerezh. Flamminañ a rae laouen an tan er siminal. Ouzh ar piano, stag da ganañ un ton gant Bellini, edo azezet ur vaouez yaouank kenedus-meurbet. O welet ac'hanon o tont e paouezas gant he

abadenn evit va degemer seven-tre. Mouskomz a rae hag un dra bennak sonnet a oa gant he doareoù. Evel roudoù glac'har a gredis merzout war he dremm ne oa ket ar gwenn-raz anezhi evit displeijout din. Dougen a rae begin bras, ur c'hañv a c'hanas em c'halon mesk-ha-mesk doujañs, deur hag azeulerezh.

Diouzh em boa klevet e Pariz e oa aozet kreizenn an Ao. Maillard dindan "hentenn an douster" e-giz a lavarer peurvuañ ; ne oa bac'het an dud enni nemet ral a wech ha bez e c'helle an darn vuiañ eus ar re glañv, dindan lagad kuzhet ar vedisined, rambreal en o frankiz dre an ti pe el liorzhoù gwisket evel tud war o skiant.

Gant an holl draoù-mañ em spered e taolen evezh ouzh kement ger am boe da zistagañ dirak ar vaouez yaouank, rak, ne oan ket sur tamm ebet e oa yac'h he spered dezhi, dreist-holl pa welen en he daoulagad ur sell nec'het. Chom a ris eta war dachenn an traoù boutin pe gentoc'h an traoù ne vijent ket bet din da c'houzout evit atizañ d'ur follez nag evit displeijout dezhi. E kement tra e respontas din gant komzoù poellek, liv ar rezon warno. Met diwar va hir a studioù war buhezoniezh ar follentez em boa desket disfiziout diouzh seurt prouennoù a yec'hed speredel ha setu perak e kendalc'his da vout war-evezh betek fin horc'haozeadenn.

D'ar poent-se ez erruas ul lakez, gwisket cheuc'h-tre en e lifrae, da ginnig deomp war ur plad frouezh a bep seurt, gwin ha diedoù all, ne ris ket fae warno ha prestik da c'houde e kuitaas an itron ar sal-emgav. Pa voe aet diwar-wel e trois endro davet va ostiz evel evit ober ur goulenn outañ.

- Nann, emezañ, o tamm ebet ... eus va familh eo hi, un nizez din hag ur vaouez pervezh war pep tra.
- Va digarezit, me ho ped, kompren a rit a-walc'h. Brudet-kaer eo e Pariz mererezh dispar ho kreizenn ha

soñjal a rae din ne vije ket bet dibosupl va c'hompren a rit"

- Ya, eveljust, ne vern ket ! Er c'hontrol, din e vefe d'ho trugarekaat evit ho ragevezh. Ral eo deomp kaout tud yaouank ken evezhiek ha c'hwi ha meur a zarvoud drastus 'zo bet c'hoarvezet dre wall zievezhiegezh hor gweladennerien. Pa veze embreget va hentenn gentañ, pa c'helle va c'hlañvourien mont da bourmen e pep lec'h diouzh o c'hoant ez eus bet kroget enno a-wechoù frapadoù-follentez dañjerus dre wall ar pennoù skañv eus an diavaez a veze pedet da weladenniñ hor c'hreizenn. Da heul eo bet ret din lakaat da dalvezout reolennoù-berz strishoc'h ; hiviziken ne c'hell dont du-mañ nemet ar re on sur eus o furnez.
- Pa oa embreget hoc'h hentenn gentañ ? emezon, o tezevell rik ar pezh en doa lavaret. Hag echu e vefe gant an hentenn hollvrudet-se ?
- Un nebeut sizhunvezhioù 'zo - a eilgerias eñ - hon eus divizet paouez a ober ganti da viken.
- N'eo ket posupl, evelato !
- Eo, eo, soñjet hon eus e oa ret-strizh - emezañ en ur huanadiñ - adstagañ gant doareoù kamm gwechall. Mantrus eo pegen arvarus e oa an hentenn dous hag en tu-hont eo bet dreist-priziet he zalvoudegezhioù. Kredañ a ran Aotrou, n'eus bet biskoazh kaset endro taol-arnod lealoc'h eget hon hini deomp ni. Graet hon eus kement tra a c'hell tud poellek klask ober. Trist eo ne vijec'h ket deuet du-mañ a-raok. Met moarvat e anavezit dre ar munudoù hon hentenn dous, 'keta ?
- O pell alese. Tout ar pezh a ouzon am eus klevet gant tud all ...

- Termenañ a rin eta evidoc'h an hentenn gant meiziadoù hollek : Un hentenn ma veze diwallet ar c'hlañvour, ma veze laosket ober. Ne eneplavaremp hini ebet eus ar faltazioù a ziwane e-barzh empenn ar re glañv. Er c'hontrol e vèzent lezet da vont gant o hent ha zoken sikouret ganeomp d'hen ober, mod-se eo bet pareet da vat kalzig a dud. N'eus ket a zisplegadenn par d'an enep-skiantaat evit touchal ouzh rezon gwan un den diskiant. Bez e voe reoù, da skouer, a gave dezho e oant kogigoù. Neuze, ni a rae un dra yael eus kement-se dre zegemerout ar gredenn, ha da heul e nac'hemp reñ dezhañ e-pad ur sizhun tamm boued all ebet estreget boued- yer . Bennoz d'an doare-mañ e veze awalc'h gant un nebeut dornadoù greun hag un nebeut meinigoù evit kaout burzhudoù.

- Aze 'oa rac'h ar pezh a raec'h, asantifi ouzh o albac'henn ?
- Ne oa ket, nann. Fiziout a raemp kalz en diduadennoù eeun evel ar sonerezh, ar c'horoll, an embregerezh-korf, ar c'hartoù, lennadennoù levrioù 'zo hag all.. Ober a raemp an asvan d'ober war-dro pep hini evit ur c'hleñved korfel boutin bennak ha kammed ne veze distaget ar ger follentez. A-bouez bras e oa reñ da gargañ da bep klañvour evezhiañ ouzh ar re all. Fiziout e speredegezh ha poellegezh un den klañv e empenn 'zo kement ha gounit anezhañ penn-da-benn . Dre-se e c'hellemp tremen hep ur rummad a-bezh a evezhierien goustus.
- Ne veze kastiz ebet ganeoc'h ?
- Hini ebet.
- Gwech ebet ne veze bac'het ho klañvourien ?
- Rouez-tre eo bet. A vare da vare pa save da varradenn kleñved un hinienn pe pa droe trumm d'ar foll-

entez drouk e veze kaset d'ul logell guzh da virout na vefe kontammet ar re all hag eno e veze dalc'het a-raok bezañ kaset endro d'e gerent pe d'e vignoned - rak n'en deus ket unan foll-drouk e blas amañ. Peurvuiañ e vezent kaset d'an ospitalioù foran.

- Ha bremañ m'eo cheñchet ganeoc'h rac'h an traoù-se, c'hwi a gav deoc'h hoc'h eus graet evit ar gwellañ ?
- Ya, 'vat, detri ! Tuioù fall hag arvaroù zoken a oa gant an hentenn-se. Pelloc'h eo bet berzet dre c'hras Doue en holl ospitalioù Bro-C'hall.
- Me 'gav souezhus-tre kement-se rak me gave din ne oa hentenn all ebet da bareañ ar follentez e kreizennoù ar vro a-bezh.
- Yaouank oc'h c'hoazh, va mignon - eme va ostiz - met deskiñ a reot d'ho tro barn hoc'h-unan ar pezh a c'hoarvez er bed ha n'eo ket diouzh rondonachoù ar re all. Arabat deoc'h krediñ seurt eus ar pezh a vez lavaret deoc'h, arabat krediñ muioc'h eget an hanter eus ar pezh a welit. Splann eo evit pezh a sell ar c'hreizennoù oc'h bet touellet gant un den dizesk bennak. Goude koan koulskoude, pa vo aet diwarnoc'h pouez ar veaj e vin prest d'ober ur valeadenn ganeoc'h dre ar greizenn a-benn ho lakaat da briziañ an hentenn a zo war va meno ha war hini an holl dud o deus gwelet ober ganti, an hini efedusañ hag a-bell eus ar re bet ijinet betek-hen .
- Hoc'h hentenn eo ? Unan nevez ijinet ganeoc'h ?
- Ya, gant lorc'h eo e kredan lavarout on an hini ken-lodekañ enni.

Toullañ a ris kaoz e-giz-se gant an Ao. Maillard e-pad un eurvezh pe ziv, digarez dezhañ da ziskouez din liorzhoù ha parkeier e greizenn.

- N'on ket - emezañ - evit leuskel ac'hanoc'h da welout ar re glañv bremañ. D'ur spered kizidik ez eo atav heugus awalc'h arvestiñ ouzh ambrenerien'zo ha ne fell ket din terriñ ho naon deoc'h a-raok koan Rak pedet oc'h eveljust da zebrifiñ asamblez ganeomp. Gellout a ran kinnig deoc'h kig-leue Santez Menehould, kaol-bleuñv gant hilienn dous ha da heul ur werennad "Klo-Voujo", gant kement-se pechañs e vo kreñvaet awalc'h ho nervennoù".

Da c'hwec'h eur e voe prest koan, va ambroug a reas an ostiz betek ur pezh sal-debrifiñ 'lec'h ma oa bodet un daoliad kaer a dud, pemp-wam-ugent pe tregont den. Evit doare e oant tud a renk uhel, tud desavetmat moarvat daoust d'o gwiskamantoù bezañ war a seblante din re alaouret ha re dost ouzh gizioù snob al lez kozh. Merzout a ris ivez ez ae an itronezed d'ober an div drederenn da nebeutañ eus ar gouvidi ha din da welet lod anezho ne oant ket gwisket tamm ebet diouzh mod Pariz diwezhañ. Un nebeut maouezed da skouer, tapet ganto o dek vloaz ha tri ugent, a oa kinklet gant bravigoù a bep seurt, bizaouedoù, troar-zornioù ha gwalennoù divskouarn. Gwelet e veze ivez o divrec'h noazh koulz hag o divronn dizolo, ur vezh ! Ar gwiskamantoù ivez a gave din ne oant ket graet mat pe gentoc'h ne zereent ket ouzh an dud a oa e-barzh. En ur drosellout e tiskoachis ar plac'h yaouank 'oan bet ambrouget d'he bete gant an Ao. Maillard er sal-emgav vihan ; met souezhet bras e vanis ouzh he gwelout gitet gant ur robenn ledan poulounez e-leizh dezhi, botoù-ler seulioù fri-minoc'h hag ur boned krammennek 'giz Bruksel, kalz re vras eviti ken ma yae lu he dremm gant ar bihan ma oa. Kentañ gwech din kejañ ganti e touge kañv 'pezh a neuzie anezhi kaer. Ma ! Un dra bennak iskis e oa gant dilhadoù an daoliad pezh a zegasas soñj din eus va menoz kent a hentenn dre an douster, marteze en doa fellet d'an Ao. Maillard va zouellañ betek fin ar pred din da chom disaouzañ rak debrifiñ asamblez gant tud loariadennek ; a-du 'rall e teuas soñj din ivez eus ar pezh a gonter

e Pariz diwar-benn proviñsianed Kreisteiz Bro-C'hall a vefe anezho tud iskis-tre ha mod-kozh un tammig, met dinec'het da vat e voen gant ar gaoz a rannis gant un nebeut kouvidi all.

Ar sal-debriñ hec'h-unan, daoust dezhi bout bras ha blotek awalc'h ne oa ket kennebeut eus ar re arzelañ tout. Diballenn e oa al leurblenk met a-benn ar fin n'eo ket un dra divoaz e Bro-C'hall. Dirideoz a oa ar prenester ; ar stalafioù, ar re a serr anezho a oa sparlet-solut gant barrinier houarn staget e kroaz e-giz ar re a reer ganto da brennañ ar staliou. Ar sal hec'h-unan a yae d'ober un tu a-bezh eus ar c'hastell, prenester a oa war dri zu eus ar pevarc'hendueg o vezañ ma oa an nor war ar pevarvet. Kement ha dek prenestr a oa en holl.

Staliet-pinvidik e oa an daol, listri plat warni ha traoù mat a bep seurt a bep tu. Traoù, traoù e-leizh ken e oa barberek. Boued-sufiz evit reiñ e walc'h da Anakim. Biskoazh em buhez n'em boa bet tro da arvestiñ ouzh stal ken stravagus, ouzh foranerezh ken stultennek eus traoù mar ar vuhez ; hep nemeur a gizidigezh avat e oa bet staliet an daol - ha va daou-lagad boas diouzh ar gouleier flour a rae poan dezho sked skodegus ur c'halz a voujiennou, war gantolorioù arc'hant bet lakaet war an daol pe strewet a bep tu er sal 'lec'h ma oa bet kavet plas dezho. Un nebeut mevelien aketus a rae war-dro ar servij. War un daol vras e traoñ ar sal e oa azezet seizh pe eizh den pep a rebed ganto, fleütoù, treujennoù-kaol hag un taboulin. Ar c'hwiled-se a vare da vare e-doug ar pred a zeuas d'am skuizhañ gant o zrouzioù liesseurt ha lieston a glaske trevezif ur sonerezh bennak hag a zegase war hañval plijadur e-leizh d'an holl gouvidi, nemedon evel-just.

Evit gwir ne oan ket evit herzel a soñjal e oa un dra bennak iskis a-walc'h en holl draoù a welen ; met 'benn ar fin ez eus a bep seurt tud war an douar

hag a gustum soñjal e meur a zoare koulz hag en em zerc'hel hervez gizioù emzivizet a bep rañs. Ouzhpenn-se, re am boa beajet evit mont da wir diskibl an "nil admirari" ; rak-se ez is em c'hoazez war va zrankilite ouzh tu dehou va c'houvier ha naon deuet betek ennon pelloc'h e ris un degemer a zoare d'ar meuzioù mat a voe servijet deomp.

Mont a rae fonnus ar gaoz endro gant an holl. An itronezed, evel boaz a gaozee kalz. Ne voen ket pell kent merzout e oa tud desavet mat eus hogos rac'h ar gouvidi, an ostiz panevetañ a zeue gantañ kontadennou farsus ha displeget skouer. War a seblant e oa troet awalc'h da savariñ a-zivout e garg a rener kreizenn ha pezh a souezhas ac'hanon e troas prestik kaoz an holl war danvez ar follentez.

- Gwechall e oa ganeomp un den - eme un den bihan tev en tu dehou din - a grede dezhañ e oa ur pod-te ; ne gavit ket se souezhus e teufe alies al loariadenn-mañ da spered ar re ziskiant ? Emichañs n'eus ket e Bro-C'hall un ospital evit ar re sot ne vefe pod-te ebet ennañ. Hon den-ni a oa ur pod-te graet e Bro-Saoz ha damantiñ a rae da lufrañ outañ e unan bep mintin gant un tamm kroc'hen demm ha gant Gwenn-Pariz.

- Ya, 'c'hat ! la'ras un den bras a-dal dezhañ, n'eus ket gwerso c'hoazh e oa ganeomp unan en devoa sanket en e benn e oa ur gwir azen anezhañ, 'pezh ne oa ket ez difetis diwir tamm ebet. Un den klañv faezhus e oa ha poaniañ a rankemp d'e zerc'hel sioul. E-pad pell-awalc'h ne fellas dezhañ debriñ nemet askol met pareet e voe ganeomp goude bezañ bet bountet warnañ evit ma chomfe un debreer-askol rik. Ne baoueze ket da winal e-giz-se..... just e-giz-se...

- Aotrou de Gog ! Anaoudek 'vefen en ho keñver ma teurvefec'h derc'hel war ho c'hoantoù !" a droc'has un itron gozh azezet e-tal egile. "Dalc'hit, mar

plij ho teisedennoù evidoc'h. Foeltret hoc'h eus va robenn brokard. N'eo ket ret marmouziñ egile kement-se, geo ? Hor c'heneil-mañ a gompreno ac'hanoc'h kenkoulz hep tout ar reuz-se. Me avat a ra ac'hanoc'h ken bras azen hag egile. Ho toare-c'hoari 'zo gwirion-bev, heñvel-poch !

- O, ho pediñ a ran d'am digarezifi, dim-zell ! O, va digarezit ! Ne oa ket em soñj ober droug ouzhoc'h. Dimezell, goulenn a ra diganeoc'h an Ao. de Gog an asant da sevel e werenn ganeoc'h.

Neuze e stouas an Ao. de Gog, pokat a reas d'e zorn dezhañ e-unan ha sevel e werenn gant an dimezell Lagadeg.

- Gant hoc'h aotre, va mignon mat - eme ouzhin an ostiz-e roin deoc'h da dañva un troc'had kig leue Santez-Menehould, eus an dibab eo.

Tri mevel nerzhus a oa deuet a-benn da zegas war an daol, dizarvoud, ur pezh mell plad pe gentoc'h ur vag, gant en he c'houch', a gav din, ar "monstrum horrendum, informe, ingens, cui lumen ademptum". En ur sellout a-dostoc'h e teuas splann din ne oa nemet ul leue bihan rostet en e bezh, penndaoulinet, un aval gantañ en e c'henou, diouzh ma ra ar Saozon gant ar gedon.

- Nann, n'em bo ket - evit gwir n'on ket troet tre d'al leue Santez n'ouzon ket penaos ken ; rak ne ya ket din tamm ebet. Lakait, mar plij, eskemm ar pladad-mañ gant ur pladad konikl kentoc'h.

Bez e oa war gostezioù an daol pladoù konikled e-giz Bro-C'hall, ur meuz dreist pa lavaran deoc'h.

- Per !, - eme an ostiz - deuit da cheñch asied d'an Aotrou ha degasit dezhañ un asiedad konikl gant kazh.

- Konikl gant petra ? a c'houlennis.

- Konikl gant kazh.

- Hemm..., ho trugarekaat a ran met emañ o vont da gaout un tamm morzhed-hoc'h kentoc'h.

Feiz ! emezon ouzhin va-unan, ne ouezer ket re petra a zebrer ouzh taol ar broviñsianed-se. N'am eus tamm c'hoant ebet da dañva ur pladad lapin gant kazh ha kazh gant lapin n'em bije ket muioc'h.

- Yao - eme unan gwenn-spontus e zremm - e penn pellañ an daol, oc'h adkavout penn d'e istor - gant traoù iskis all e teu soñj din eus ur c'hlañvour hon eus bet ganeomp mare 'zo bet, hag a gave dezhañ e oa ur pezh keuz eus Cordoba, hag eñ da vale da bep korn gant e gontell en e zorn ha da ginnig d'e holl vignoned kemer un troc'had, un troc'hadig hepken eus e vorzhed evit tañva.

- Ya, ur sapre diskiant e oa, sur-tre met ne oa ket koulz c'hoazh - eme unan all, hag egile hon eus anavezet holl nemet an "jenteleman" estren-mañ evel-just. Un den a rae anezhañ e-unan ur voutailhad Champagn hag a zirolle dalc'hmat gant e baw, baw ha pshiii.....mod-se.

D'an ampoent divergont-tre an den a lakaas e veud dehou dindan e jod kleiz ha gant ur sachadenn brim e reas un trouz heñvel ouzh brammadenn ur voutailhad Champagn distouvet, hag o c'hoari gant beg e deod war e zent e leuskas ur c'hwitelladenn skiltr e-doug un nebeut eilennoù, re bar da hini eonenn ar Champagn. Emzalc'h ar paotr ne blijas ket nemeur, anat din, d'an Aotrou Maillard. Chom a reas mut neoazh hag un denig treut-kagn dezhañ ur berukenn dev a gendalc'has gant ar gaouz.

- Bez e oa ivez - emezañ - unan sot-nay a felle dezhañ

tremen da c'hlesker hag anzav a rankan e tenne kalz da unan. A, m'az piye gwelet anezhañ, Aotrou, pa gomze ganin-me e vije bet teneraet ho kalon ken dre welout e zoareoù ken gwirion. Aotrou, ma ne oa ket ur glesker eus an den-se e oa evit gwir truezus meurbet ne vije ket bet unan. Koagal a rae evel-hen: "O...O...O...G.... OOOOOO.....O...OGH... Kaerañ notenn ar bed e oa, ur si blot ! Ha pa zaouiline ouzh an daol e-giz-se e ledanae e c'henou hag e rae d'e zaoulagad treiñ mod-se a-raok lakaat anezho da vlinkañ buan-tre evel-hen pa lavaran deoc'h. Hen lavarout a ran deoc'h krenn ha krak, sebezet e vijec'h bet gant dibaregezh hon den.

- Moarvat, emezon
- Bez e oa ivez - eme unan all - bez e oa ivez ar Posteg bihan a grede bezañ ur meudad butun hag a chome mantret dre ne c'helle ket tapout krog ennañ e-unan etre e viz-yod hag e viz-meud.
- Unan all 'zo bet ganeomp ivez, a oa Jul ar Pab e anv hag a oa ur sapre istrogell ivez, treiñ a reas foll gant ar soñj bezañ ur sitrouilhezenn. Dibaouez e veze oc'h argadiñ ar c'heginer da vezañ lakaet e pastez met egile a nac'he bep tro, feuket bras an tamm anezhañ. Me avat ne zislavarin ket anezhañ, ur meuz a zoare e tle bezañ an dourtenn "Jul ar Pab".
- A gav deoc'h ? - emezon - o sellout ouzh an Ao. Maillard evel evit goulenn outañ e ali.
- Ha ! Ha ! Ha ! Ha ! - eme hemañ - He ! He ! Hi ! Ho ! Ho ! Hu ! Hu ! Dreist evit gwir. Arabat deoc'h mont ken souezhet va mignon mat, hor c'heneil a zo ur c'hwil, ur farser touet ; arabat kemer da wir bater kement tra a vez dibunet gantañ.
- Bez e oa ivez - eme ur c'houviad all - Kaourantin Nedeleg, un den eus ar re iskisañ ivez. Ar garantez

a lakaas e spered da dreiñ ken e teuas da grediñ en doa daou benn. Unan hervezañ a oa hini Cicero hag egile rannet e daou, war e veno, a yae d'ober penn Demosthen eus an tal betek ar genou hag hini Lord Grougham adal ar genou betek e c'hroñj. Marteze ne oa ket ar gwir gantañ met kendrec'h et vijec'h bet gantañ rak prezegenner dispar e oa. Entanet-ruz e oa gant karantez ar prezegennoù ha ne oa ket evit mirout a brouiñ d'an dud pegen brav e ouie prezeg. Boaz e veze, da skouer, da bignat mode-se war en daol ha da

D'an ampoent, kouviad nesañ hor prezegenner a vac'has un tammig war e skoaz en ur c'huzulikat e chuchumuchu e pleg e skouarn, egile neuze a baouezas krenn gant e gomz ha kouezhañ a reas en e goaez.

- Bez e oa ivez - eme ar chuchumucher - ar "c'hazh-mezv" Bouboull eus e anv. Ober a ran ar "c'hazh-mezv" anezhañ peogwir e teuas en un doare iskis met poellek awalc'h da grediñ e oa aet da gornigell. Peadra da folliñ a c'hoarzhin ouzh e welout o treiñ. Troidellañ a rae war e seul mod-se ha you ha 'giz-se....

Pelloc'h horprezegenner a rentas an hevelep ser-vij d'an troideller.

- Fidamdoue ! - a estlammas ur vaouez kozh - diskiant, diskiant ha sot-pitilh ouzhpenn e oa an Ao. Bouboull. Rak, biskoazh, hañ, tudoù, n'eus bet klevet anv eus un den "kazh-mezv", geo ? Lu eo kement-se. Evel ma ouzoc'h e oa an Itron Drantik ur vaouez a skiant vat. Ur seurt froudenn a oa dezhi ivez, ur froudenn diwanet diouzh ar skiant vat eveljust hag a roe plijadur forzh pegement d'ar re o doa an eurvad d'hec'h anaout. Meizet he doa, goude hir brederian e oa bet dre ur gwallzarvoud troet e kilhog yaouank, met kogig anezhi en em zerc'hel a rae hervez an doareoù mat. Hejañ a rae he divaskell e-giz-se, gant strivoù

start, ha na brav e ouie kanañ ! Ko.....O.....
 ..O.....O.....G.....K.....OG.....
 ...KO.....O.....OO.....O..... K!
 KO.....TO.....O.....GO..... TO
GO.....O.....O.....O.....O.....K

- Trawalc'h, trawalc'h ! Paouezit diouzhtu, mar plij Itron Drantik - a strakas mouezh an ostiz fallimoret. Ma n'oc'h ket evit en em zerc'hel e-giz ur vaouez desavet mat ouzh taol e aotrean ac'hanoc'h d'hon kuitaat diouzhtu. Deoc'h da zibab.

An Itron (a raed ivez an Itron Drantik amezhi , souezhusañ tra goude an abadenn-mañ) a ruzias-prim , mezhek bras dindan ar grozadenn. Stouñ a reas he fenn hep rannañ grik. Un Itron yaouankoc'h a gendalc'has gant ar gaoz. Koantenn ar sal-emgav an hini 'oa.

- Ya, 'vat ! - emezi - Foll-mik e oa an Itron Drantik ! Margodig Henaff avat a oa kalz a skiant vat en he barn. Un Itron yaouank e barr he c'hened e oa, dezhi un emzalc'h doujus hag uvel. Kavout a rae dezhi e oa gros-kenañ en em wiskañ e-giz ma ra an dud, hi a felle dezhi dalbec'h en em wiskañ er-maez eus he dilhad e-lec'h en em lakaat e-barzh. Aesat tra e gwirionez ! N'eus nemet lemel se, ha se c'hoazh ha se

- O, va Salver ! Dimezell Henaff ! - a huchas un dou-sennad a vouezhioù a-gevret - petra emac'h oc'h ober ? Trawalc'h, trawalc'h e giz-se, gouest omp da gompren mat-tre, awalc'h dre c'hras Doue !

Krog e oa endev un nebeut tud da zilammat diouzh o c'hadorioù evit herzel outi d'en em lakaat heñvel ouzh Venus ar Medicis pa voe sevenet aes ha trumm o c'hefridi gant krioù bras pe huchadennoù a zeue eus brasañ savadur ar c'hastell. Spontet a-walc'h e voen ivez evit gwir gant an huchadennoù met truez avat am

boe ouzh ar gouvidi arall : Biskoazh an diaoul em buhez n'em boa gwelet ur bodad tud vat chom ken mantret. Liv ar marv a zeuas war o dremmoù, en em damolodif a raent war o c'hadorioù, krenañ a raent, balbouzat gant ar spont ; war-c'hed edont holl eus an trouz. Klevet e voe adarre, kreñvoc'h hag evel war-dostaat, uhel - tre un trede gwech hag izeloc'h evel war steuzif. Pa voe tavet ar gorventenn e sioulaas ivez d'an dud, c'hwezhiñ a reas ar vuhez adarre hag an istorioù a gendalc'has da vont en-dro. Kreñf a ris goulenn pennabeg ar strafuilh-se.

- Ne vern ket - a respontas din a Ao. Maillard - Gwall voazet omp ouzh kement-se ha ne reomp ket biloù. Ar re foll a grog a vare da vare da huchal asamblez, an eil oc'h isañ egile evel ma c'hoarvez a-wechoù diouzh an noz gant ur vandennad chas. A-wechoù ivez, pa vezont bodet a-gevret e klaskont en em sikour holl da dec'hout, bez ez eus da ziwall eveljust.

- Pet den 'zo ganeoc'h bremañ en toull ?

- Evit ar mare n'eus ket muioc'h evit dek en holl.

- Maouezed an darn vuiañ anezho, emichañs ?

- N'int ket a'c'hat ! Gwazed rac'h, ha gwazed kreñv m'hen tou deoc'h !

- Iskis eo ! A-viskoazh em boa klevet e oa an darn vuiañ eus ar re foll ag hor c'henseurtezed.

- Peurvuiñ, ya, gwir eo, ket bepred ! N'eus ket pell c'hoazh e oa amañ e-tro 27 klañvour hag en o zouez 18 maouez met nevez 'zo eo bet cheñchet an traoù.

- Yav, ya, kemm 'zo bet evel ma welit - a lavaras an Actrou a oa bet darbet dezhañ terriñ gwerzhid- c'har an Dimezell Drantik.

- Ya, kemm bras a zo bet evel ma welit - a ziskanas a-unvouezh peurrest ar bodad.
- Dalc'hit war ho teodoù ! Grit peoc'h ! a huchas va c'houvier o vont e kounnar ruz. Chom a reas mut an dud a-pad ur vunutenn. Ur vaouez a sentas pizh ouzh gourc'hemenn an Ao. Maillard, tennañ a reas un hir a deod er-maez ha kemer krog ennañ gant he daouzorn, chom a eure e-giz-se betek fin ar pred.
- Hag an Itron-se ? a c'houlennis a-vouezh izel ouzh an Ao. Maillard, gouzout a rit ar vaouez kaezh a gomze bremaik, an hini a gane he c'ho.....O.....T..
.....O.....GO.....O.....TO.....GO.....O.
.....O.....O.....O.....O.....K ; dinoaz eo, n'eo ket ?
- Dinoaz - emezañ o trevezif ur souezhadenn - Penaos 'ta ? Petra emao'h o kontañ din ?
- N'eo ket klañv un tammig ? - emezon o touchal ouzh va zal - N'eo ket gwall-douchet, geo ?
- Va Doue benniget, biskoazh kemend-all ! Ken yac'h a spered ha me eo an Itron Drantik, mignonez kozh din eo. Doareoù iskis he deus gwezh ha gwezh arall met gouzout a rit penaos emañ kont gant ar maouezed, gant ar re ken kabac'h-se dreist-holl.
- Moarvat, moarvat - emezon - Hag ar pep all eus an dud ?
- Va gwarded ha va mignoned int - eme an Ao. Maillard, reut hag uhel an tamm anezhañ - mignoned nes din ha skoazellerien.
- Hañ ? Tout ar re-se hag ar merc'hed war ar marc'had !
- Dien - emezañ - Ne vefemp ket evit mont war-raok hep

ar maouezed, gwellañ klañvdiourien evit ar re foll int ; doareoù dezho o-unan o deus, c'hwi 'oar. Efedoù marzhus o deus gant o daoulagad, seizañ a reont un tammig e-giz an naered, c'hwi 'oar ?

- Ya, a-dra-sur ! - emezon - Ya, da ! Un doare iskis a zo dezho d'en em zerc'hel memestra. Un dra bennak divoas, ne gav ket deoc'h ?
- Iskis, divoas. A gav deoc'h ? Na pegen iskis ! Ni amañ er C'hreiss.....tei....z e vezomp kus...s. tum...m d'ober un tamm farsite, bourrañ a reomp bevañ e giz-se.... Kompren a rit
- Ya, mat-tre, mat-tre
- Ma, ar C'hlo-Voujo-mañ a lakafe unan e-barzh, un tammig re domm e kavan anezhañ, mat eo deoc'h ?
- Ya, mat eo, un tammig re domm, memestra.
- Gwir eo. Met, Aotrou, ma ne fazian ket hoc'h eus lavaret pelloc'h e oa hoc'h hentenn nevez-erlerc'hiet ouzh hini an douster unan strizh ha garv.
- Tamm ebet. Strizh-meurbet eo ar vac'hidigezh, gwir eo, met an doare d'ober war-dro ar re glañv a vefe kentoc'h plijus evito.
- Ganeoc'h eo bet ijinet an hentenn-se ?
- Pas penn da benn. Loñ anezhi a zo bet degaset gant an doktor Koltar, a anavezit eveljust hag un nebeut azasderioù 'm eus kemeret digant labourioù an Ao. Pluñv hollvrudet, hoc'h eus moarvat klevet mil meuleudi diwar e-benn.
- Feiz, rankout a ran lavarout siwazh, n'em eus morse bet klevet anv betek-hen eus an daou zen-se.

- 'Alato ! - a lavaras va ostiz gant estlamm en ur sachañ e gador war-dreñv hag en ur sevel e zaouarn d'an nec'h - Emichañs 'm eus komprenet a-dreuz . N'eo ket posupl n'anavezfec'h ket nag an doktor Koltar, un den gouizieq meurbet, nag an Ao. Pluñv un den brudet bras ma'z eus.

- Ma, re wir eo, n'anavezañ ket anezho. Met, gant ar vezh ez an d'en em lakaat hep dale da lenn o oberemmoù ! Ruziañ a ran gant ar vezh da vout chomet keit-all hep anaout an daou zen meur-se, tud dreist-meurbet an eil koulz hag egile hep mar ebet. Mezh am eus bout ken dizesk.

- Ne ra forzh, va mignon mat - a lavaras va c'houvier-frealzer, o stardañ va dorn - evomp a galon pep a werennad eus ar Sotern-mañ.

Evañ a rejomp. Ar re all a reas kemend-all hag a zalc'has da vont da c'houde. Marvailhat a raent, farsal, c'hoarzhin hag ober traoù droch e-leizh. Gri-goñsat a rae ar rebed, rataplanañ a rae an taboulin en e washañ, an treujennoù-kaol avleje e-giz ken lies a dirvi Falaris - hag ar saliad a-bezh o vont war-ziroll mui-oc'h-mui bep ma yae mezv an dud, ken e teuas da vezañ un doare Pandemonium in petto. Padal an Ao. Maillard ha me, gant un nebeut boutailhoù Sotern ha Klo-Voujo etrezomp, a gendalc'he da gaozeal a-bouez-penn. Aner 'vije bet distagañ ur ger war an notenn voas rak ne vije ket bet klevet muioc'h eget bramm ur pesk e goueled an Niagara.

- Lavaret ho poa din a-raok ar pred e oa arvarioù bras gant hentenn an doster. Pere int, just awalc'h ?

- Ya, dañjerus-tre e oa a-wechoù, rak gant ar re sot n'eus ket tu da zivinout o froudennoù ; war va meno koulz ha war reoù an aotrounez Koltar ha Pluñv ne zlefer ket lezel anezho da bourmen en o frankiz hep evezhier war o zro. Doñvaet un tammig a c'hell bezañ

- un den diskiant, e giz 'ta lar kalz, evit ur pennad, met goude e teuo da vezañ reuzus adarre. En tu-hont memes, bez e c'heller lavarout n'eus ket finoc'h louarn eget unan diskiant. M'en deus rak-soñjet un dro bennak e oar c'hoari ar pilpouz ken e oar, ha n'eus ket barrekok'h evitañ da dreveziañ ar boellegezh ; peadra da vogañ prederiadennoù hor bredoniourien. Pa seblant unan sot bezañ en e sioulañ, neuze, kredit ac'hanon eo tremen poent gwiskañ dezhañ ar roched kreñv.

- Me a wel, ya, mes, an dañjerioù a oa anv anezho tuchant ; war ho skiant-prenet deoc'h-c'hwi daoust hag eñ hoc'h eus bet abegoù sirius da zisfiziout diouzh ar re a frankiz a veze lezet gant ar re sot.

- Amañ, a ya 'vat ! Da skouer, n'eus ket keit - all c'hoazh ez eus c'hoarvezet un darvoud en ti-mañ . Mont a rae endro hentenn ar frankiz ha lezet e veze ar re glañv da vont en o frankiz. Eus ar re yac'hañ tout e oa o emzalc'h ken m'en dije gellet a-dra sur un den a skiant vat divinout e oa un irienn diaoulek bennak ouzh hor gedal dindan an enebañs a furnez-se. Ur beurevezh e voe staget, ereet penn-kil-ha-troad ha stlapet el lochennoù an evezhierien. D'o zro ar re foll a evezhias war ar re vac'het.

- Gastoù ! N'eo ket posupl evelato ?

- Re wir eo, a la'ran deoc'h. Kement-se en em gavas bennoz d'ur marc'h sot, un den peurziboell, lakaet gantañ en e benn en devoa ijinnet gwellañ reizhad a c'houarnamant bet morse erounezet, ur gouarnamant a dud diskiant el rezon !

- C'hoant en doa lakaat amprouiñ e soñj ha ken brav en em dennas ma teuas a-benn da vodañ en dro dezhañ an holl glañvourien all a-benn diskar ar galloud-ren.

- Dont a reas a-benn ?

- Ya 'vat ! Cheñchet 'voe penn d'ar vazh. Mont a reas ar warded da glañvourien hag ar re-mañ a evezhias warno. Met cheñchamant a oe degaset e-barzh ar maner memestra, ne voe ket anv a frankiz ken, ken prim paket ar warded ha bac'het, ha gant ur servij gwall-iskis war o zro ...
- Deuet eo buan un enep taol-stad, m'eus aon. Ne oa ket an dra-se evit padout gant an dud war - ar -maez tro-dro hag ar weladennerien gouest da vrudañ an afer..
- 'maoc'h ket ganti, tamm ebet ! Re fin 'oa penn ar re emsavet da vezañ paket. Adalek neuze ne leuskas gweladenn ebet ken da zont tre, nemet ur wezh ur "jentleman", buzore an tamm anezhañ ha ne c'halled ket kaout disfiziañs dioutañ. Aotreet e voe da weladenniñ ar greizenn, da gaout un tamm plijadur ha da farsal un tammig. Pa oe bet c'hoariet gantañ pell-awalc'h e voe laosket da vont kuit.
- Pegeit en deus padet gouarnamant ar re foll a-benn ar fin ?
- O, pellik evit gwir, ur miz da vihanañ ha pase ur miz zoken. E keit-se ar re foll o devoe plijadur e-leizh, m'hen tou deoc'h. Teurel a rejont d'ar blotoù o dilhad kozh takonet-holl evit gwiskañ dilhad ha bravigoù ar familh. Pourvez gwin mat a oa e kaviou ar c'hastell hag ar re-se a ouie priziañ ar gwin mat.. E-keit m'he deus padet an abadenn o deus bevet o gwalc'h, a, feiz ya
- Ha petore louzeier, peseurt hentenn-bareañ en doa penn an emsavidí lakaet da dalvezout ?
- Ma, e giz 'm eus lavaret deoc'h dija n'eo ket dav da unan foll bout un azen ha d'am meno e oa kalz gwelloc'h o hentenn eget an hini a oa a-raok. Ur berlezenn, un dra grenn, klok, eeun, didrabas ha dispar hep mar ebet rak

D'an ampoent e vanas digomz va ostiz, klevet ma veze adarre an hevelep huchadennoù o doa spontet anezho a-raok dija. Ar wech-mañ avat e hañvale an dud a grie dedostaat afo.

- Va Doue, dichapet eo ar re foll an taol-mañ ! emezon
- M'eus aon e vefe ar gwir ganeoc'h - eme an Aotrou Maillard deuet adarre liv ar marv war e zremm.

A-vec'h peurzistaget gantañ e frazenn ma voe klevet huchadennoù, kunujennoù, leoù touet mesk-ha-mesk dindan ar prenestr ha diouzhtu goude e voe anat din e klaske ar re-se dont-tre dre penn all ar sal. Tourtañ a raed ouzh an nor gant ur maout bennak, ur goadenn pe un horzh n'ouzon dare. Hejet-dihejet oa ar voliji dindan ar gorventenn o diskogelle.

Da heul, e-mesk an talabao, ar reuz diaoulek ez eas luziet an traoù. Gant souezh e welis an Aotrou Maillard ripañ a-flav da vont da guzh dindan ar ganastell. Muic'h a youl e oan engortoz diouzh e berzh. Paotred al laz-seniñ, hag int re vezv evit c'hoari abaoe ur c'hard eur, a zilammas adarre war an daol gant o binvioù hag e stagjont ouzh ur "Yankee - Doodle" holl asamblez, ne zeuas ket reizh-reizh ganto met padout a reas kalonek betek dibenn ar reuz.

Neuze e voe gwelet ar paotr a oa bet miret outañ a bignat war an daol lammat e-kreiz ar boutailhoù hag ar gwerennoù. Kerkent m'en em gavas en e vleud e krogas gant ur brezegenn, eus an dibab sur-tre ma vije bet moaien da gompren ur ger eus ar pezh a gonte. An den a c'hoarie ar c'hazh-mezv a rae ar c'hazh-mezv da vat, treiñ a rae endro d'ar sal e-giz bannoù ur veilh-avel, strivañ a rae kement ha ma c'halle, o tisteurel, o tiskar, o tispenn pep tra dirazañ. Brammoù boutailhadoù divountet ha c'hwitelladenn eonenn ar Champagn a veze klevet ivez en tousmac'h, aner eo lavaret deoc'h e

teuent eus trevez ar pred. An den-glesker ivez a
goage ken a c'halle, evel m'en devije c'hoariet silvi-
digezh e ene war bep notenn. Er cholori a-us d'an
trouziou all e klevet ivez yezhoù un azen. Va mignonez
kozh, an Itron Drantik, a oa ken nec'hamantet m'em
biije leñvet gant an trist ma oa. En he sav e oa, en ur
c'horn, e-tal ar siminal ha ne rae ken met kanañ a-
voleadoù he c'ho.....O.....T.....O.....G
.....O.....O.....T.....O.....GO....O.....K....

Erfin e teuas an diskoulm d'hon drama meur. Evel
ne oa nemet ar c'hrioù, an huchadennoù, ar youc'hadennoù
hag ar c'hogtogotogokoù da virout ouzh ar re dichapet
da zont e-barzh e voe freuzet buan an daou brenestr.
Biken ne zisofjin va spont, va spouron, va c'horfañ aon,
ar skoulmoù a reas va stripoù pa welis o tifulkañ eus
ar prenestroù, o sailhañ en hon mesk, o tifreñ gant
o zreid, o daouarn hag o skilfoù, ur bagad euzhviled a
youc'he ken e raent, marmouzien bras war va soñj kentañ,
orang-outangoù pe babouzed du tev eus kap ar Spi Mat.

Dindan ur grizilhad taolioù en em ripis da vont da
damolodiñ dindan ur gourvez-vank 'lec'h ma chomis mort.
Goude ur c'hard eur bennaket diouzh selaou ar pezh a
c'hoarveze er sal e teuis a-benn gant an diwezh da
gaout ster ar reuz-c'hoari. An Aotrou Maillard pa
gonte din troioù-kaer an den foll en em savet gant e
genseurte n'en devoa graet nemet fougasiñ e avantur
dezhañ e-unan. Rak, pennrener ar greizenn e oa bet an
Aotrou daou pe dri bloaz arak ; neuze trefket e skiant
vat gantañ e oa tremenet d'an tu all, ouzh kostez ar re
glañv. Dic'houzvez a-grenn eus kement-se e oa va
c'henveajer, anat eo.

Ar warded, dek anezho en holl, a oa bet argadet
trumm, koltaret gant ar brasañ damant ha bac'het er
c'havioù. 'Tok ur miz e oant chomet bac'het hag e-keit-
se en doa an Ao. Maillard roet dezho gant largetez
hag ar c'holtar hag ar pluñv (pezh a rae e hentenn)
met ivez un tamm bara bep an amzer ha dour da veuziñ.

Bemdez e veze kaset dezho o lod, ur strinkadenn dour
gant ar pomp ha mat pell 'zo ! A-benn ar fin e teuas
a-benn unan anezho da dec'hout dre ur c'han-distrouilh
ha da zieubiñ ar re all.

Mont a ra endro adarre, azasaet anezhi evel ma
teree eveljust, hentenn an douster er c'hastell. N'on
ket koulskoude evit dislavarout an Ao. Maillard pa doue
e oa eeun ha didrabas e hentenn, didrabas-tre memes,
hep an disterañ trabas.....

Un nebeut gerioù c'hoazh. Daoust din bezañ graet
va fri-furch en holl levrageoù Europa n'on ket deuet
a-benn c'hoazh da ziskoachañ nep skouerenn eus oberoù
meur an Doktor Koltar hag ar C'helenner Pluñv.

Alan-Edgar POE

(brezhoneg gant Padrig an HABASK)

Troidigezh eus un danevell skrivet gant Edgar POE hag
embannet e-touez e "Istoriou chin ha sirius"

AR C'HEVRIN HA NE VO BIKEN DIZOLOET

Pet gwech em boa pignet gant an hent-se ? Ne c'hellfen ket lavarout : war droad, war varc'h-houarn, war-lerc'h ar saout, gant va c'hi, gant bugale all ar gêriadenn, gant va breudeur. An deiz-se a oa ar wech kentañ ma teuen da di va mamm-gozh abaoe ma oah deut en-dro eus Bro-Skos e-lec'h ma oah chomet e-pad ur bloaz. From, un tamm a oa ennon oc'h adkavout lec'h va gwellañ eñvorioù. Va fenn a oa leun a skeudenoù a bep seurt.

Kustum e oah da dremen er gêriadenn-se va holl vakañsoù ha pep sulvezh ivez ar peurrest eus ar bloaz. Ti ma mamm-gozh a oa ti al levenez, ti ar vuhez virvidik. Bez' e veze dalc'hmat un den bennak en ti. Diouzh ar beure e teue ar maouezed d'ober o c'hefridioù, hag ar gwazed da evañ o banne gwin : bez' e oa ar re gustum a zeue bepred, d'ar memes eur, meur a wech bemdeiz; ar re na zeuent nemet p'o devoa kavet ur c'heneil; hag ar re a c'helle kaout ur wech an amzer un digarez bennak da zont, evel prenañ eoul evit keflusker an traktour pe orjal dreinek pe c'hoazh heuzoù. Ar re-se a eve o banne prim ha prim gant aon na errufe o gwreg er stal : ne oant ket sañset bezañ "ostizien kustum ti Sandrin."

Ur stal seurt ar re na vezont ket gwelet alies ken he doa ma mamm-gozh : ur "supermarché" mod kozh. Gwerzhet e veze evaj, ispiserezh, kinkailherezh, drammerezh, lienaj, bonederezh, botoù-koad, hag all, hag all... Ouzhpenn-se e oa ma mamm-gozh kemerezh

ar gêriadenn. Met er bloavezhioù diwezhañ ne rae mui nemet tavañjerioù evit ar maouezed kozh.

Ouzhpenn e oa ret servij an holl dud, kempenn an ti, keginañ, reiñ boued d'al lapined ha d'ar yer. Ret e oa ivez kemer amzer evit ober war-dro al liorz.

Diouzh an abardaez e oah boas da vont da c'haloupat war ar maez met bepred war ar memes tu. Ti ma mamm-gozh a oa savet war vord an hent. A-raok erruiñ eno e oa ret diskenn gant an hent. Ha diouzh blein an hent-se e weled ar maezioù tro-dro. Met un dra iskis a oa : pa selled war an tu kleiz eus an hent, e oa sklaer an traoù evel pa vije bet muioc'h a sklerijenn. Ne oa ket kalz gwez. Gwir eo e oa bet graet an adlodennañ pell 'zo, pa oah bihan c'hoazh. Er c'hontrol, pa selled war an tu dehou e oa tefivaloc'h ar maez. Ur seurt kevrin a zevere diouzh ar maez aze. Bez' e oa un draoñienn sac'het etre daou venez. Ur bern gwez a oa, gwez tefival. Va sell a oa boemet gant an tu-se eus an hent evel pa vije bet un nerzh bennak deuet ne oaren ket eus pelec'h o sachañ warnon. Ha bep gwech ma'z aen da bourmen, peurliesañ gant va breur, e treuzemp an hent hag ez aemp da vale war an tu-se. Ne oared ket perak. Sankañ a raemp hon-unan en defivalijenn-se. Dedennet e oamp gant al lec'h-se met aon a oa ennomp un tamm. Ne lavaremp grik an eil ouzh egile nemet pa zeue da vezañ re bounner pouez an didrouz. Farsal a raed evit argas an aon met ar c'hevrin a chome. Perak e kemeremp an hentoù gwezekañ, pa c'hellemp mont dre ar parkeier e-lec'h ma vije bet tu da welout petra a c'hoarveze en-dro dimp. Ne vije ket bet klevet an holl drouzoù bihan a glevemp dindan ar gwez, war ar pallennadur delioù, pe a-hed ar wazh. Bez' e anavezemp ar vro-se dre 'n eñvor, pep pleg en hentoù, pep gwezenn, pep bodad drez a vije tu d'ober diwarnañ korfadoù mouar. Pa hon devoa c'hoant da zizoleiñ ul lec'h bennak all ez aemp da goll alies. Met o vont er-maez diouzh an hentoù boaz e c'helljemp marteze dizoleiñ ar c'hevrin...

An deiz-se, koulskoude, e oaren mat na vije dizo-
loet biken. Ne chome na tamm banal na bod lann ebet.
Biken ne vije mouar na kraoñ ken. Dirazon ec'h astenne
ur vro blat, ijinenoù hag asfalt. Difoupañ a eure
an daeroù em daoulagad. Ne c'hellen ket mont war-raok
ken. Va izili a grene. Da gentañ e voen mantret. An
aotrounez o devoa lazhet un tamm eus va bugaleaj.
Peseurt gwir o devoa kemeret aze ? Kounnar a ziwanes
ennon. Kompren a raen un tamm muioc'h c'hoazh perak
e oa tud o stourm e Breizh hep dezho bezañ dalc'hmat
barrek da zisplegañ resis abeg o stourm : en o c'horf
e c'hoarvez an traoù. N'eo ket hepken istor ur vro a
vez distrujet met ivez c'hoazh istor don hinienoù
eus ar vro-se. Met pep hini a chom e-unan gant e
dristidigezh, tristidigezh o welout un tamm eus e
zouar, da lavarout eo un tamm anezhañ e-unan, o
vezañ pilpaset. C'hoant am bije bet da youc'hal. Ha
petra a c'hortozemp evit diskouez dezho hon devoa
c'hoant da vevañ e Breizh ha n'eo ket bezañ implijet
evit lakaat arc'hant en o godell, evit levezon Bro-
C'hall ...

Plac'h kaezh : oc'h ober soñjoù emañ ! An dud
a dremen dirazon er straed gant o istor dezho o-unan,
gant o buhez hag o freder ha n'it ket va re-me
moarvat. Bet int touellet gant gerioù ar re a oa mes-
troniezh ar re gozh ganto, ar re a oa uhel o mouezh
abalamour m'o devoa mouget mouezh ar re o devoa un
dra bennak da lavarout. Siwazh ne oa na gant an istor,
na gant ar yezh, al levezon dereat. Met dereat evit
piv ?

DE VILLIERS DE L'ISLE-ADAM

AR MERDEAD SAVACH

Er gevred da Dir-an-Tan, ez eus bet merzet,
nevez 'zo, e-kreiz ar mor bras un enezenn pell-pell
diouzh nep hini all hag a oa tremenet betek-hen e-
biou da lunedenoù, hag i akuit avat, ar voraeerien.

En enezenn-se, abaoe kantvedoù, edo en he bleuiv
ur ouenn a Vorianed, dilamprek a-youl-gaer, hag o
doa degemeret da lezenn-diazez (ul lezenn embannet
gwechall gant unan eus o zierned furañ), dezho da
ziwall da viken an donezon dibar-se a'n natur, ma
ve "gwasket etre div astell klopennoù o bugale,
diouzhtu ma oant ganet, da virout outo a vezañ gouest
da soñjal biken e traoù re uhel".

An dro a oa deut ken boas dezho ha ma vez deomp
distagellañ bugale, - hag evelse, kaset da get an
nebeut aspadenoù a chome ganto eus o skiant da lenn,
en ur mod fonetek hepken, - ha da skrivañ, - dizigajus
pe dost, - e troe ar boblad-skouer-mañ en ur chatal
dizrouk.

Dre beseurt diviz kevrinus a-berzh an Tonkad e
oa bet Tomolo Ke Ke, an emzivad du, pempvet troad
d'ar maout, dianket diouzh al lezenn voutin ken ma
oa gentañ ur glopenn naturel ur vezh ?... Den ne oar.
Bezeta vezo, pa oa ast en e oad-gour, a-bouez mont
diouzh e "genseurted" da bourmen hurennek dindan ar
baobabez, e oa deut en e spered, gwir pe faos, ar
soñjezon espar-mañ na oa ket an Douar evit bezañ ken
strizh hag e enezenn.

Tra ma oa trevellet don gant ar c'heal iskis-mañ, setu ma voe roet lañs d'e ratozh hardizh dre un degouezh dic'hortoz, - seurt ma c'hoarvez dalc'hmat gant ar seurt tud-se.

E-kreiz un ouf digenvez, ma oa bet dedennet e evezh gant ur poull-tro divoas, e kavas an enezad ijinek-mañ tu da ergerzhout kondonioù ar poull-mañ. Kompren a reas hepdale e oa stummet, ken eeun ha tra, gant div froud-vor, a oa an dagell anezho en ouf-mañ end-eeun. Ur pikol skourr, krenn-holl, stlapet er froud a dec'he kuit, a yeas diwar-wel ken prim hag al luc'hed davet henchoù dianav. Tri devezh goude en doe Tomolo Ke Ke (a oa war-c'hed, nec'h ennañ, eus e zistrot dre ar froud all) an eurvad d'e welout o tont endro ha da zastum anezhañ. Ne oa ket bet distreset-bras ; gant ar froud a rede a-hed kamdroioù ar c'herreg e oa bet sturiet koulz ha gant ul loman, ha levezeg vras e voe d'an amoder merzout e oa enskantet en ur penn dezhañ atredoù-douar e oa dibourvez-kaer anezho pa oa aet kuit. Hama ! ne oa ket bet touellet gant e raksantad.

Dindan un hantervloavezh e voe savet gant ar paotr souezhus Ke Ke e sioulder e logell digenvez ur vag tev, benet e derc'h ur vanglezenn, pikerniek e zaou benn, hag a oa tu da beurglozañ (a-drugarez d'un indu druz e teue displu e zachadoù kleuz kerkent ha ma oa serret ar vag). Diwar arnodif hag adarnodif e teuas dizale da verzout e tizhe e damm skour kreizenn all an hirgelc'h stummet gant ar froudoù, - pa oa kempouez estrezo, - e-korf un devezh hanter pe war-dro ; ha diwar jedoù ijinek-dreist (n'eus ket reoù all gant ar savajed-se !) en doa kavet resis pegement a lastr a oa ret lakaat en e vag (enni e benn-person ha daou geneil a vent gantañ) evit ma chomfe dindan vol, hep

sankañ na divorif, en ahel ar froud. Dre zellid hela-varded an dud gouestlet-holl d'ur gefridi e teuas Tomolo Ke Ke a-benn da zegas daou eus e genvroiz war e lerc'h en e ergerzhadenn ; birvilh enno o selaou e gomzoù flour e roas ar re-se o asant, en ur zañsal ar brall-kamm.

Bez ez eus un died moredus, kerkoulz anavezet gant meuriadoù distro ha ma'z eo gant Yogied an Indez, a c'heller, dre he ferzh, chom, hervez ar c'hement-mañ-kement a euvrer anezhi, morvitellet, hep debrif na analañ, keit ha ma karer.

An tri ferveval a lonkfe peadra da gousket pemp eur ha tregont pep hini. An hini a zihunfe da gentañ a droc'hfe, a-daol tomahawk, ar plañson skoulmet e diabarzh ar vag da zerc'hel al lastr ; sankañ a rafe ar stouv deil kaoutchoug en toull ha sevel a rafed, e-korf teir eilenn, war-c'horre ar mor ; ano, digoret ar golo gant ur bountad nerzhus, e tianalfed da gentañ ha goude e tizolofed en douar nevez. Neuze, pa vent chomet pell pe belloc'h e-touez pobladoù dedennus ar c'harter, e savfe an tri merdead war lestr en-dro. Sankañ a rafent e-kreiz ar froud gin ha gant harp an eil kementad died, kaset ganto a-ispilh ouzh o gourizoù, e tistrofent war o enezenn c'henidik lec'h ma tezevellfent pep tra en un emvod meur dirak ar roue.

Evel ma weler, ne oa tra dirouestloc'h eget-se.

Dre ur mintinvezh kaer, eta, ez eas ar persevaled du en o gourvez en o bag, euvret ganto an dram rekis, ha kerkent ha ma santjont ar c'housked o tont, kludet ar golo, en em lezjont, dre hejañ ar vag a-gevret, da ruilhañ er froud o lamas ken prim hag ur bir.

Pemp eur ha tregont war-lerc'h, war-dro seizh eur hanter en abardaez, Tomolo Ke Ke, a oa dihunet da gentañ, a-drugarez d'e anien vividik, a droc'has al lastr, hag en ul luc'hedenn en em zispakas ar vag dicouledus war w el war-c'horre ar mor, tra ma save a-us d'an trikon ergerzherien-mañ steredegi dianav dezho. Dirak daoulagadoù, dispourbellet gant an estlamm, an tri faotr, en em zisplege un arvor hep e bar, ha tro-war-dro dezho euzhadennoù divent hag a vranselle war ar mor, ha kant-ha-mil tredemarzh drêst-meiz, ken ma chomas sonnet o zaloù kurunennet gant pluñv liesliv. Pezh a dizhent gwelout, ne ve ger ebet da zentañ kont anezhañ. Tomolo Ke Ke avat, plaen e-giz ma tere da vlenier un droad heverk, a ziskouezas resis d'e genseurted e pelec'h e tarzhe moarvat, - e gwirionez hep mar ebet evitañ, - ar froud gin hag en ur lezel ar vag (kuzhet etre div garreg a-us d'ar froud) e gward ar re-se, en em avanturas, e-un-penn ha dichipot, e-kreiz burzhudoù an arvor-se.

Edo Tomolo Ke Ke o paouez dizoleiñ Bali ar Ganabeg e Marsilha.

Tra ma oa, gant ar soñj dija da ober un drevadenn anezhi, o perc'hennañ didro ar vali-se e anv roue e enezenn dre ur jestraddenn-lid, e voe gwelet gant un hanter-zousennad martoloded a ziflupe gant yudadennoù gouez eus un davarn en trowardroioù, - lec'h ma oant bet o koaniañ e skeud ar gwez en ur evañ forzh boutailh-adoù. Ar re-se, anat dezho e oa an Diaoul dirazo, en em stlapas warnañ. Ar merdead dichañsus, pa oa c'hoant ennañ d'en em zifenn, a voe torret e benn war an tomm gant ar vartoloded kredik-se dindan selloù lemnet gant ar spont e zaou lakez.

Ar re-se, o tivarc'hañ daoulagadoù skoelf a-hed hag a-dreuz, a verzas en o c'hichen war an traezh ur c'hozh tamm fun disofijet. Tapout krog enni, stagañ

outi ur pezh tamm maen, - un drederenn skaffvoc'h eget al lastr kentañ, - setu pezh a rejont en ur frapadig.

Kaset ganto ar vag war veg pellañ ar c'herreg, a-us d'ar froud salvus bet diskouezet dezho gant an hini marv, e lonkjont war ar prim ar peurrest eus an dram, en em siljont er vag, e kludjont warno ar golo displu ha, o luskañ ar vag a-nerzh eus an diabarzh, e plomjont er mor o sachañ war o lerc'h ar fun hag al lastr en he c'hreiz.

Pemp eur ha tregont goude, e voe dihunet ar gouskerien en ul lamm gant storlok o bag o stekif a-benn-kaer ouzh reier o enezenn. Diframmet o lestr, e voent kuitezet gant ur gouzonkadenn o disemplas da vat daoust dezho ha distroet e-touez o c'henseurted, an dour en o daoulagad ha strafuilhet da viken gant pezh o doa gwelet ahont, e kontjont an afer.

Evit ar wech e voe divizet gant ar roue ma ve lakaet d'ar marv kement ozhac'h a dremenfe hiviziken hep "krennañ klopennoù e vugale".

Kement ha ken bihan ma c'hoarvezas gant ar C'habiten Troc'havel ar C'hoadoù - pa'n em avanturas, heuliet gant ur bagad niverus, en enezenn-se bet dizoloet gantañ (un toullad bloavezhioù zo), e-kreiz ar bobl-se, seven, dilamprek ha parfet, - gwelout e kêrbenn an enezenn, e kreizig-kreiz leurgêr vras al Logelloù, ur meni monument talfaset gant prenn ha mein, ha marellet warnañ un enskrivadur.

Pa voe deut ar jubennour a-benn da doullañ kaoz, en em lezas an ofiserien ha zoken martoloded al lestrad (pa voe kontet dezho an istor) da rambreal gant ar souezh e-pad ur pennadig, o klevout e talvez e ar gerioù skrivet eno kement-mañ : E KOUN TOMOLO KE KE DROUKLAZHET GANT AR SAVAJED.

Brezhoneg gant E. VALLERIE

ANTONIA

Antonia a skuilhas dour yen-skorn en he gwerenn hag a lakaas he boked-glas enni.

- Kenavezo deoc'h, orselioù gwin Spagn ! emezi.

Hag o stouñ davet ur c'hantolor, lirezhin, e lakaas tan war ur papelito rodellet en-dro d'ur meudad phèresli ; hag ar jestr-se a hadas steredennoù en he blev, du evel glaou-douar.

A-hed an noz e oa aet Jerez ganeomp. Dre ar prenestr, digor war liorzhoù ar c'henkiz, e klevemp sarac'h an deil.

Frondif a rae hor mourroù gant c'hwezh ar santal, - hag ivez dre m'hon leze Antonia da gutuilh rozennoù livrin he diweuz, a bep eil, gant ur goantiri ken didro ma ne save gwarizi ebet diwar-se. Sellout a rae da c'houde, sart, ouzh he skeudenn e melezourioù ar sal ; pa droe war-du ennomp, heñvel ouzh Kleopatra, d'en em welout c'hoazh en hon daoulagad e oa.

Ouzh hec'h askre yaouank e stirlinke ur galonenn aour mouk, warni lizherennoù e mein-lufr (lizherennoù-tal hec'h anv), a-ispilh ouzh ur voulouzenn du.

- Un arouez-kañv ? N'oc'h ket mui e karantez gantañ ?

Hag endra m'he briataed :

- Sellit 'ta !... emezi.

Gant hec'h ivin mistr e tistagas klochedoù ar brageriz kevrinek hag ar galonenn ha digeriñ. Ur vleuñvenn deñval a garantez a gouske enni, diwar blev du gweet gant awen.

- Antonia, diwar-se e tiskouez ho karedig bezañ ur floc'h amjestr, kabestret gant ho kwidreoù.

- Ur ravailhon ne roje ket deoc'h, ken didroidell-se, seurt merkoù a garantez.

- Fall eo o diskouez e-kreiz an orged !

Antonia a darzhas da c'hoarzhin, ken drant, ker sklintin ma voe ret dezhi evañ dour war ar prim, adouez he violetez, evit na wallje ket outi.

- Ha ne rank ket ur galonenn bezañ blev e-barzh enni ? e testeni ?... emezi.

- Eo, moarvat.

- Allas, karediged kaezh, diouzh kelenn va enñvorioù, ur gizenn din am eus choazet - ha ganin her miran...
EN UR RATOZH A FEALDED.

Brezhoneg gant E. VALLERIE

BLEUNIOU AN DEÑVALIJENN

Tud vat a dremen dre amañ
Pedit gant an Anaon

Enskrivadenn war vord un hent bras

A nozvezhioù kaer ! Dirak tiez-kafe lugernus ar
boulouardoù, war leurennoù ar bastezourien vrudet,
nag a bompinenned, nag a vrageerien vak a zihued o
anzer.

Hag ar bokederezed ha mont ha dont gant o faniri.

Ar c'hoantenned arouarek a zegemer ar bleunioù-
mañ, a dremen, dastumet-brav, kevrinek...

- Kevrinek ?

- Ya, mar boe !

Klevit eta, lennerezed lizhñin : bez ez eus e
Paris end-æun ur stal defival he deus tonket ur
marc'had gant un niver eus ar re a gas an obidoù
pompadus, gant toullerien zoken, e sell da "zistaliañ"
tud varv ar mintin, da virout na'z afe da weñviñ EN
ANER, war ar bezioù nevez, an holl vokedoù dispar,
an holl dorkadoù, an holl rozennoù a vez berniet
bemdez, a-gantadoù, war ar geleriou gant karantez
ar vugale hag ar priedoù.

Ankounac'haet e vez ar bleunioù-se, atav pe dost,
goude al lidoù tefival. Ne soñjer ket mui enno ; gant

ar mall da vont kuit, - n'eo ket souezh !... D'ar mare-
se e c'hoari hor beziereien vat anezhi, a-zevri-bev.
N'int ket evit ankounac'haat ar bleunioù, an aotrouien-
mañ ! Ne chomont ket da rambreal. Tud a intrudu ez int.
Kas a reont ar bleunioù a-vriad, didrouz-kaer, ha war
ar prim en o zaolont dreist ar voger, en un tumporell
deuet e kental ; n'eo ket pell ar frapad.

Daou pe dri eus ar re zrantañ ha diluañ anezho a
gas ar samm prizius e ti bleunierazed, mignonezed
dezho, a gempenn an dilerc'hioù melkonius-se, gant o
bizied gwevn, e mil doare da sevel lies bokedoù, ken
bokedoù justin ha bokedoù-dorn, ha pennoù-roz zoken.

Neuze e teu marc'hadourezed yaouank ar pardaez,
gant pep a baner. Mont ha dont a reont, emezomp, ouzh
skleurioù kentañ ar c'hleuzeurioù, war ar boulouardoù,
dirak al leurennoù skedus hag e kement lec'h ma vez
ebatoù.

Hag ar yaouankizoù kerterius, c'hoant enno da vezañ
degouezhet-mat gant ar stipadennoù e vezont douget dezho,
a bren ar bleunioù-se, uhel-briz, hag o c'hinnig d'o
itronezed.

Ar re-se, gwenn-holl gant ar fard, o c'hemer gant
ur minc'hoarzh yen hag o dalc'h en o dorn - pe o sank
en o brënnidenn.

Ha gant luc'h an aezhenn eo glas an dremennoù.

Ken m'emañ gant ar spezoù-bev-mañ, pinfet evel-se,
hep rat dezho, gant bleunioù an Ankou, arouez ar garan-
tez a reont hag an hini a resevont.

Brezhoneg gant E. VALLERIE

at will be your knife - n'eo kat' awhash... O'er here
as a choice for barter and exchange, a-very-
Wint' hat' ev'it' an'k'as' had' at' his' own, an' an'k'as'
will' be' ch'as'nt' kat' de' kat'as'at, but' a' kat'as'at' an' kat'
Kat' a' kat' an' kat'as'at' a-very, kat'as'at' an' kat'
an' kat' an' kat'as'at' kat' an' kat' an' kat'as'at'
kat' a' kat' an' kat'as'at' ; n'eo kat' kat' an' kat'as'at'

kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'

kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'

kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'

kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'

kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'
kat' an' kat' an' kat'as'at' an' kat' an' kat'as'at'

